


285

KIMIAD AR ZOUDARD YAOUANK

gant Prosper PROUX.

War an tòn ordinal pe war an tòn neve-man.



Ma c'halon a zo frailhet dre nerz ma enkrezou. Ma da -
ou - la - gad en - ta - net n'o deuz mui a zae - rou, Deud
eo siou - az! an devez ma ren - kan di - le - zel Lec'h
kaer ma bu - ga - le - ach, ma bro ga er Breiz - Izel.

Ma c'halon a zo frailhet dre nerz ma enkrezou,
Ma daoulagad entanet n'o deuz mui a zaerou;
Deud eo, siouaz! an devez ma renkan dilezel
Lec'h kaer ma bugaleach, ma bro gaer Breiz-Izel!

Keno d'id, ma zi balan, kuset 'barz an draouien,
Tachen c'hilaz war behini, bugel, e c'hoarienn;
Gwez ivin ker bodennek, e disheol a bere,
E-pad tomder an hanvou, e kousken da greiz-de.

Keno! keno! mamm ha tad, breman n'esperit mui
E chomfe ho mab kared da harpa ho kozni,
Evit gounid d'ec'h bara, 'vel m'hoc'h euz gread d'ezan;
Al Lezen zo didruez, ho kwitaad a renkan.

— 2 —

Nag a wech, ma mamm dener, e renkfet-hu lenva,
Pa zeuy ma c'hi ankenied en-dro d'ec'h da ruza ;
Pa welfet, war an oaled, ma skabellik c'houllou
Hag ar c'hifnid o steui war ma feun-baz derou.

Keno ! bered ar barrez, douarou binniget,
Pere a guz ma c'herent gand ar Zalver galvet ;
Da ouel an Anaon klemmuz, n'in mui war ho peziou
Da skuilha dour binniget mesket gand ma daerou.

Keno ! ma muia karet, ma dousik koant Mari,
Eur blanneden digar a zeu d'hon glac'hari ;
Euruzdel ha levenez skeduz zo tremenet
'Vel en oabl ar goumoulen gand an avel kaset.

Na welin mui da lagad ker lemm ha ker laouen
O virvi gand plijadur, e ti pe erruen,
Da zournik gwenn ker mibin o trei ar c'har en dro ;
Da vouez flour mui na glevin o kana va gwerzo.

Pa oamp er c'hatekismou, hon daou c'hoaz bugale,
Hon c'halonou diskiant, e kuz a 'n em gleve ;
Dirag Gwerc'hez ar c'hroaz-hent, nag a wech e touejomp
Na erruje birviken disparti etrezomp !

Yaouang ha dibreder, siouaz ! ne wiemp ket
Nag ha bet c'houerventez er vuez zo hadet ;
Evidomp ne oa, neuze, Lezennou na Roue,
N'anveemp 'med eul Lezen, hini ar garante.

Keno ! ma nez-amezek, Yannik ma gwir vignon,
Kamarad ma c'hoariou, ma breur dre ar galon ;
Piou a gemero breman lod ebarz ma foanio ?
Piou a gomzo ganin-me deuz ar gear hag ar vro ?

Hepdoun te yelo breman d'ar parreziou tosta,
Da bigosad al leuriou 'barz el lajou-dornia ;

— 3 —

Hepdoun te yel da c'hounid maout ar c'hourennaded,
Da chasa war rubanou ebarz er varadek

Keno ! ma c'hazek velen, skanv evel eun heiez,
Mistr evel eul logoden, gentil vel eun oanez ;
N'ez santin ken dindanoun, gand an hast, o tripal,
Ma daouarn mui ne stagint ar zeien war da dal.

Keno ! ma c'hi keaz Mindu, ma leal kamarad,
N'efomp ken, dre ar c'hlizen, da glask roudou ar c'had ;
Ne glevin ken, er menez, da chilpaden skiItruz,
War ma dourn mui ne zantin da deod karantezuz.

A-benn eun nebeud amzer, kalz a vignoned yen,
'Barz er zoudard divroet, nep mar, ne sonjfont ken ;
Mes da galon-te, Mindu, n'eo ket ken ankoezuz,
Pell e ri c'hoaz va c'hanvou, gand da yezou klemmuz.

Keno ta, plijaduriou, leuriou-nevez, prejou,
Nezadegou, nozveziou, foariou ha pardonieu,
Ebatou ker birvidik, biniou zard ha sklentin,
Na drido mui va c'halon gand da zoniou lirzin.

Keno kemend a garan, keno da virviken !
Pell diouz a Vreiz me varvo, mantret gand an anken !
'Vel eur blanten gizidik, evid ar vro krouet,
A renk gwenvi ha mervel, kerkent m'eo divroet.

